


ANN TAER GWALENN



Ton gwercs ann Otro Lay, pé hini : *Kimiad ar zoudard iaouang*, pe hini :
Al labourer, pe eunn all.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro !
Ar paour n'euz ken evit-han, n'euz ken nemet daero.
« *Mamm geaz*, 'me ar vugale, *mamm geaz eunn tamm bara !* »
Hag ar vamm geaz a dro kein : allaz ! n'e deuz netra.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro !
N'eo ken ar gwellan merer 'vit pean he otro.
Hag e ve 'nn douar d'ean, kaer en ije poanian,
Goude labourat bemde 'n ije bec'h o vevan.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro !
Ann oll a oar evel-d-on. n'euz nemet klemm tro-dro :
Klemm a ra ar marc'hadour pe wel n'all ken gwerzan,
Hag ann hini 'n euz eomm a glemm pe n' all prenan.

N'euz ket pell 'oatevuruz, ha hirie gant labour
Zo poan kad eunn tamm bara da zouban barz ann dour ;
Kalz n'ho deuz ken tol labour, kalz a ia da vro-bell
Da glask gonid ho bue pe n'oullont ket mervel.

C'houi oar petra zo kiriek, c'houi oar kerkoulz ha me :
Daou la zo war al leurio na c'hoerz na kan ne ve ;
Plouz zo enn-dro d'ar berchenn, allaz ! barz ar c'hrignel,
Ne glever ken ann treuscho o klemm gand ar wastel.

C'houi gar petra zo kiriek : Mestr a zo hag a vo,
Mestr a zo du-hont euz krec'h ha pe ve red e sko.
Mestr a zo du-hont euz krec'h enn he dorn taer gwalenn,
Taer gwalenn vraz a gast, *Brezel, Kernez, Bosenn*.

Brezel zo bet ha brezel vel ne ve ket bemde :
Den ne larfe pegement zo du-hont 'nn ho gourve,
'Nn ho gourve pell euz ar ger, enn kreiz ho 'n oad skoet.
Eur Mestr a zo, ma zud keaz, pe sko e sko kalz.

Bosenn zo bet : Bretoned, c'houi oar kerkoulz ha me ;
Marteze c'h euz-hi gwelet enn kichen ho kwele.
Bosenn zo bet ha Brezel, chetu bremañ Kernez !
Bet true, o ma Doue, true euz ann dud kez !

Doue zo Mestr da gentan, ober rei pe garo
Amzer vad hag amzer fall evid ann douaro,
Heol tomm ha glao ha grizil ha reo hag avel fol.
Doue zo Mestr da gentan, red mad hen anzav oll.

Glac'haret eo ma c'halon o sellet ouz ma bro,
O welet zo kristenien eur mestr d'he enn envo,
Kristenien hag c'war-n-he taer gwalemm ker kalet,
Kristenien baour o vevan vel pe ve mestr e-bet.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellann ouz ma bro !
Kälz zo 'n euz laket Doue warlerc'h ho affero :
Ann arc'hant zo da gentan, da gentan 'r blijadur,
Ha goude bean pinvik, mar be gallet, oer fur.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellann ouz ma bro !
Ne spont den evit laret ha braz ar pec'hejo ;
N'euz den e-bet zouezet gant ar pec'her mezuz,
Huel he benn o vale 'toucez ann dud enoruz.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellann ouz ma bro !

— « *Pelec'h et-hu, ma zud kez, pe 'zon ar gouspero,
Pelec'h et-hu evel-se, pe 'noc'h greet ken kaer !* »

Hag ann dud kez a levar : « *'Man 'nn ebato enn kear ?* »

Enn kear 'man ann ebato ! arc'hant zo adarre,
Arc hant gant plac'h diwar-meaz da gad gijo neve,
Arc'hand a zo gant keariz da lakat jolori,
Ha keit-se emu ti ar paour ne vo tamm da dibri.

Ebat zo ha jolori ! Et, tud kez, ha redet.
Enn-pad ann de c'houi danso, pe vo noz e tansfet ;
Danset, hag otrone kear gan-hoc'h-hu a c'hoerzo ;
Doue 'vad ne c'hoerzo ket, ha Doue a skoo.

He dra zo da bep-hini, ar zul zo da Doue,
Zul d'abarde zo d'ehan kerkoulz hag ar beure ;
Ha pe welan ann dud kez, pep sul gant-he, c'bat,
N'on ken evit harz ann dour da dont em zaoulagad.

« Pelec'h, me ar vugale, e van bep sul ma zad ?

Ar wreg paour ne laro ked ha kri he c'halonad.

Ne ve ket zul evit-han mar tistrofe d'ar ger,

Hep rei d'ann hosteleri he ialc'h hag he amzer.

Ouspenn ziuouaz ! e roer enn hostelerio :

Kalz zo o kotl ho ine hag ho lod enn envo,

Kalz zo o koll ho enor, tud iaouank, c'houi 'oar vad :

Mez a chomm gan-hoc'h goude, ha keun re diwead.

Ia, rannet eo ma c'halon pa zellan ouz ma bro !

Hastet buan, beleien, re hurr ann ofiso ;

Ne vet ket pell o prézeg, skuiz eo ar gristenien.

Eun-berr enn hosteleri ne skuizo allaz ! den.

Ia, rannet eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro,

Pe zellan ar iaouankiz o pleustri-pardonio :

N'eo ket da welet ar Zant ziuouaz ! e tireder,

Ha goude c'hoaz ne gav den ann tu da doud d'ar ger.

Ia rannet eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro !

Dre-oll e welan tier skouer fall gand ar penno ;

Dirollet ar vugale, ne rer ket d'he plegan :

Tad ha mamm, diweatoc'h e vo red d'hae'h goelan.

Eunn tad mad ne bleg kammet d'eur bugel didalve,

Bepreü e sko war-n-ehan nemet doujet e ve ;

Doujet d'ann Hiui zo Krec'h, tud keaz, hag-e paouzo,

Miret d'ehan he lezenn ha zur mad ho miro.

Bet Kristenien, c'hoaz eur wech, Kristenien hed ha hed,

Gras Doue enn ho kalon dre-oll pe valefet ;

Ha mar be poan awecho, goud a ret, er bed-man,

Ne ve kad evurusted nemet goude prenan.

Bet kristenien, e'hoaz eur wech, Kristenien hed ha hed,

Peuc'h ha furnez 'nn ho tier, hag er meaz ar pec'het ;

Mar be poan, glasket zikour, vel gwechall ho tado,

Zikour ann Itron Varia ha zikour Sent ho pro.

Et da Wenngamp, da Vulat, d'ar Ieodet, d'ar Sklerdet,

Et da welet ho mamm goz, Santez Anna Wened,

Et da welet Sant Tual, Sant Pol, Sant Kaourantin,

Sant Samson ha Sant Patern, Sant Ervoan Kervarzin.

Nag on bet-me evuruz o tond daleg bian,
O toned da Landreger da welet Sant Ervoan.

« *M'hen pedez, 'me ar re goz, Sant Ervoan ez klevo :*
« Bennoz Doue vo gan-id ha gant da douaro. »

Enn Iliz-vraz Landreger, da gad ann Eskopti,
Zo 'r be, ha min ru war-n-han, ha paouroc'h n'euz hini,
Be Sant Ervoan Helori, mez em euz o laret,
Bourc'hijen kear zo gant-he kaeroc'h be er verred.

Gwechall goz e oa enon eur be euz ar c'haeran,
Hep dale c'hoaz, Bretoned, ha dac'h-hu e laran,
Hep dale c'hoaz, Sant Ervoan en o eur be neve,
Ha pep Breton en evo he vin e-barz ar be.

Hag e ve paour ar paouran be ar Zant binniget,
Deut war-n-ehan da bedi ha c'houi vo chileoet,
Gwechall rouane ar vro, a deue dierc'henn,
A deue da Landreger, war be Tad ar bevien.

Frealzet ve ma c'halon pe welan o tremen
Penn Sant Ervoan Kervarzin, aour flamm he gurunenn,
Mar benn fur, e sonjan-me, 'm o kurunenn vel-se,
Mar ne ve ket war douar, e vo zur mad enn Ee.

Pep bla pe deufet er meaz euz Iliz-vraz Treger.
Pe 'n efet d'ar Minihi gant procession kear,
Savet ho penn, Sant Ervoan, da zellet ouz ho pro,
Ma vo furnez gand ann dud hag ed enn douaro.

Ni bedo ha kaloneg enn chapel Kervarzin,
Gwechall hoc'h bet aliez enon war ho taoulin,
Pedi 'refomp kaloneg ha pep bla ni deui,
Gand ar pardon d'ho kwelet, Zant mad, vel hon tado.

Ia deut oll, deut, Tregeriz, 'nn ho touez eo bet gant;
Goeloiz, c'houi deui ive, bepred vec'h chileoet;
C'houi deui hag e vec'h pelloc'h, c'houi deui, tud vad Kerneo;
Sant Ervoan iez aliez da Vulat enn he veo.

Glac'haret eo ma c'halon pe zellan ouz ma bro!
Pardon, pardon, ma Doue, evid hon fec'hejo!
Abalamour da Vari, ho Mamm hag hon Itron,
'Balamour da zant Ervoan, ha Zend hon bro, pardon!

LAOUENAN KOAT-ERMIT.